

# Raktres Skolaj

## Diwan Bro Leon Gwiseni

Bloavezh 2007 / 2008

### Taolenn

1	Ober eus ar brezhoneg ur yezh vevañ.....	2
2	Stummañ, heuliañ hag henchañ ar skolajidi .....	2
3	Ober eus ar skolaj ul lec'h a geodedouriezh .....	2
4	Lakaat e pleustr .....	3
5	Ar priziañ .....	11
6	Stagadennoù .....	12
6.1	Karta Diwan.....	12
6.2	Raktres pedagogiezh Eil Derezh Diwan.....	13
6.3	An AKED .....	14
6.4	Ar beajoù .....	15
6.5	Istor ar Skolaj.....	15
6.6	Sevel ul lec'h skoliata ha bevañ klok.....	16

Raktres skolaj Diwan Gwiseni a zo diazezet, evel just, war testennoù boutin d'an holl skolioù Diwan : Karta Diwan ha Raktres Pedagogiezh Eil Derezh Diwan, a vez kavet staget e fin an teuliad-mañ.

Ar palioù a vez kinniget amañ a zo resisadurioù war un nebeud poentoù a felle deomp donaat pe war an doare da dizhout ar palioù.

## **1 Ober eus ar brezhoneg ur yezh vevañ**

Goulennet e vez d'ar skolajidi ober gant ar brezhoneg en holl zegouezhioù en amzer e tremenont er skolaj. Kement-se evit lakaat anezho da vezañ en o bleud e brezhoneg ha da vestroniañ ar yezh.

Seul ziaesoc'h e vo d'ar skolajidi doujañ ouzh ar reolenn-se ma ne gomprenont ket ar perag. Ret eo d'ar skolajidi anavezout raktres Diwan ha bezañ mennet da gemer perzh ennañ. Ret eo dezho ivez anavezout sevenadur Breizh war tachennoù all eget ar yezh.

Pal ar skolaj eo lakaat an holl skolajidi da vestroniañ ar brezhoneg ha da zoujañ outañ kement hag ouzh danvez Breizh dre vras.

## **2 Stummañ, heuliañ hag henchañ ar skolajidi**

Pal ar skolaj eo stummañ an holl skolajidi ha rein tro dezho da zont a-benn er gevredigezh, war an tachennoù sokial ha micherel.

A bouez eo anavezout mat ar skolajidi a erru er skolaj a benn gellet ober war dro : peseurt live skol a zo ganto, peseurt live brezhoneg a zo ganto, eus peseurt skol e teuont, peseurt diaezamantoù a zo ganto, petra a soñj dezho ober goude ar skolaj, ....

Kelaouet e vez tamm ha tamm ar familhoù hag ar skolajidi evito da zibab an hent gwellañ goude ar c'hlasad 3e. Adalek ar 6vet e c'heller kregiñ da gizidikaat ar skolajidi.

## **3 Ober eus ar skolaj ul lec'h a geodedouriezh**

Ar skolaj a rank bezañ ul lec'h eskemm etre an holl berzhidi : ar skipailh pedagogel, ar gerent hag ar skolajidi.

Evit ar pezh a denn eus ar skolajidi, eo pal ar skolaj diorriñ o emrenerezh hag o c'hirriegerzh war an tachennoù a denn eus o buhez..

## 4 Lakaat e pleustr

### Ober eus ar brezhoneg ur yezh vevañ

Ober	Doare	Priziañ
<b>Gouel an Trec'h</b>	C'hoarioù hag oberezhioù e brezhoneg a vez kinniget e-pad an devezhioù sport azoet evit ar re CM2 ha 6vet pe 5vet ha 4 <sup>e</sup> .	
<b>Devezhioù kizidikadur</b>	Div wech ar bloaz e vez kinniget d'ar skolajidi dizoloiñ un den, ur stourm, un darvoud, un oberenn, ... evit lakaat anezho da gomprenn gwelloc'h istor ar brezhoneg.	
<b>Liammañ ar skolaj gant bed ar brezhoneg</b>	Digeriñ ar skolaj da gement tra a vez graet e brezhoneg hag a denn eus krennarded : koumanantiñ da gelaouennoù (Ya, Meuriad, Bremañ, ...), sellet ouzh pezhioù c'hoariñ, ouzh filmoù, heuliañ an abadennoù a zo war internet, pourveziñ levraoueg ar skolaj gant al levrioù, ar bandennoù treset nevez embannet,	
<b>Eskemm gant ar vrezhonegerien a oad ganto</b>	Eskemm gant skolajidi all (Diwan pe skolioù all) dre Internet (blogoù, lec'hiennoù, ...), kemer perzh hag aozañ devezhioù sport ha c'hoarioù e brezhoneg (Diwan Sport, reiñ lañs d'ar Yezh, ...), ...	
<b>Kinnig oberennoù en diavaezh eus ar skolaj</b>	Klask skignañ ar pezh a vez graet (pezhioù c'hoariñ, filmoù, sketchoù, kanaouennoù, dañsoù, sonerezh, ....) er maez eus ar skolaj. Kement-se a c'hell bezañ graet dre eztaoladennoù, arvestoù, kazetennoù, radioù, TV, kenstrivadegoù, ....	
<b>Embrizhiañ</b>	Muzuliañ ur wech ar bloaz al live implij ar brezhoneg a zo er skolaj (enklask). Kinnig doareoù da wellaat an traoù. Priziañ an araokadennoù	A bouez e vije lakaat ar gerent da gemer perzh.

	e fin ar bloaz.	
<b>Sevel liammoù etre an holl doareoù brezhonegerien</b>	Reiñ tro d'ar skolajidi da gejañ gant a-bep seurt tud dre ar brezhoneg (Treizerien ha klaskerien soñjoù, pediñ tud da zont d'ar skolaj, mont er maez da wellet tud pe lec'hioù, ...)	
<b>Sevel liammoù gant brezhonegerien tost outo</b>	Sevel darempredoù gant ar gerent, an tud-kozh, an amezeien, ...	
<b>Implij emren eus ar yezh</b>	<p>Ar skolajidi n'o deus ket da selaou brezhoneg pe da respont e brezhoneg nemetken, met da grouiñ, da gas raktresoù da benn <b>dre ar brezhoneg</b>.</p> <ul style="list-style-type: none"> <li>• Enklaskoù, atersiñ tud er skolaj pe er maez</li> <li>• Labourioù “kroaziet” etre danvezioù (implij an urzhiataerezh evit ur skoulmad matematikoù, implij Internet evit un teuliad SVD, implij ar video evit un eztaoladenn, ...)</li> <li>• Aozañ ha kinnig ur raktres (devezh trok, gouel an trec'h, ...).</li> </ul>	
<b>Kaout plijadur dre ar brezhoneg</b>	Beilhadegoù a vez kinniget d'ar skolajidi er c'houkva.	

## Stummañ, Heuliañ hag Henchañ ar skolajidi

Ober	Doare	Priziañ
<b>E 6<sup>vet</sup> Klas</b>		
<b>Dizoloñ micherioù ar skolaj</b>	<p><u>Den e karg</u> : Penngelenner</p> <p>Kinniget e vez d'arr skolajidi ar micherioù a zo er skolaj : implijidi kempenn, sekretourez, kasour, kelenner, rener.</p> <p>Liammet gant ar programm Deskadurezh Keodedel.</p>	
<b>Prizhiadenn vroadel e 6vet</b>	<p>Lakaet e vez ar skolajidi 6vet da dremen ar briziadenn vroadel kinniget gant an deskadurezh stad (Galleg ha Matematikou). Tremen a reont ivez ur briziadenn vrezhoneg aozet gant kelennerien Diwan.</p> <p>An disoc'hoù a vez skignet d'ar familhoù, d'ar skolioù orin ha dalc'het er skolaj.</p>	
<b>PAI, PPRE</b>	<p>E-pad an trimiziad kentañ, e vez klasket ar skolajidi a rankfe bezañ skoazellet gant ur PAI pe ur PPRE.</p> <p>[PAI : Plan d'Accueil Personnalisé evit ar skolajidi o deus diaesterioù displeksezhañ da skouer PPRE : Projet Personnalisé de Réussite Educative evit ar re o deus diaesamantoù e-keñver al labour skol].</p> <p>La bouret e vez gant ar skolioù kentañ derez evit kaout ar muiañ a ditouroù diozhtu da vare an distro-skol.</p>	

**E 5<sup>vet</sup> Klas**

<b>Hentenn Diwan</b>	<u>Den e karg</u> : Penngelenner Anavezout an hentenn Diwan e-keñver ar skolioù publik ha prevez.	
<b>Dizoloñ micherioù</b>	<u>Den e karg</u> : Kelenner Deskadurezh Keodedel Pep skolajiad a zibab ur vicher hag a ginnig anezhi d'ar c'hlasad. Al labour-se a c'hell bezañ diazezet war lec'hiennoù internet (ONISEP, ...)	

**E 4<sup>e</sup> Klas**

<b>Staj micher</b>	<u>Den e karg</u> : Penngelenner Pep skolajiad a dremen 3 devezh en un embregerezh evit dizoloñ bed al labour dre vras hag ur vicher resis.	Ur skritell a zo da brientiñ. Displeget e vez ar staj dirak ar c'hlasad. Priziet e vez al labour e-keñver ar brezhoneg hag an danvez. Ar gerent hag an dud e karg eus ar stajoù a vez pedet.
<b>Dizoloñ ar CIO</b>	<u>Den e karg</u> : Penngelenner Kaset e vez ar c'hlasad da weladenniñ ar CIO lec'hel (Landerne)	
<b>Dizoloñ un embregerezh</b>	<u>Den e karg</u> : Penngelenner Kaset e vez ar c'hlasad da weladenniñ un embregerezh eus ar vor (Moulerzh Cloitre)	

**E 3<sup>e</sup> Klas**

<b>Staj micher</b>	<u>Den e karg</u> : Penngelenner Pep skolajiad a dremen 5 devezh en un embregerezh evit dizoloñ bed al labour dre vras hag ur vicher resis.	Un teuliad a zo da skrivañ. Priziet e vez e-keñver ar brezhoneg, ar c'hinnig (urzhiataerezh) hag an
--------------------	--	---

		danvez.
<b>Kinnig Lise Diwan Karaez</b>	<p><u>Den e karg</u> : Penngelenner ha rener</p> <p>Un eskemm a vez aozet gant Lise Diwan Karaez evit ar skolajidi da zizoloiñ anezhañ. Kinniget e vez d'ar skolajidi eskemm gant rener ha kelennerien al lise hag ivez gant liseidi. Pedet e vez ar gerent ivez da eskemm gant tud al lise.</p>	
<b>Kemer perzh e Kroazhent ar micherioù</b>	<p><u>Den e karg</u> : Penngelenner ha rener</p> <p>Ar c'hlasad 3e a za da Garaez da dremen 1 devezh evit gwelladenniñ al lise Diwan ha kemer perzh e saloñs ar micherioù. Dalc'het e vez e brezhoneg penn da benn ar pezh a ro tro d'ar skolajidi da gaout ur sell war bed al labour e ha dre ar brezhoneg.</p>	
<b>Fichenn Hentañ</b>	<p><u>Den e karg</u> : Penngelenner</p> <p>Bep trimiziad e vez leuniet ur fichenn hentañ gant dibaboù ar skolajiad hag evezhiadennoù ar skipailh pedagogel.</p>	
<b>Dorioù digor el liseoù</b>	<p><u>Den e karg</u> : Penngelenner</p> <p>Kelaouet e vez ar skolajidi eus an devezhioù dorioù digor a vez aozet er vro.</p>	
<b>An AKED</b>	<p>Lakaet e vez ar skolajidi 3e da dremen an AKED (Arnodenn Kentañ an Eil Derezh) kinniget gant Diwan.</p> <p>An disoc'hoù a vez skignet d'ar familhoù ha dalc'het er skolaj.</p>	
<b>Ar BREVED</b>	<p>Lakaet e vez ar skolajidi 3e da dremen an DNB (Diplôme National du Brevet) kinniget gant an Deskadurezh Stad..</p> <p>An disoc'hoù a vez skignet d'ar familhoù ha dalc'het er skolaj.</p>	

<b>Holl liveoù</b>		
<b>Disoc'hoù skol</b>	An notennoù paket gant ur skolajiad, eus ar 6vet d'an trede, a vez kinniget bep trimiziad da vare ar c'huzul klas. A vloaz da vloaz e vez dalc'het disoc'hoù pep skolajiad en ur c'harned skol.	Melestradur ar skolaj a zo e karg da zerc'hel ar c'harned skol a nevez.
<b>Kudennoù emzalc'h</b>	Ar c'hudennoù emzalc'h grevus (emvod gant ar familh, gant ar penngelenn, gant ar penngasour, gant ar rener) a vez menneget en ur renkell ha dalc'het e sekretourva ar skolaj keit m'emañ ar skolajiad er skolaj.	Ar penngasour a zo e karg da zerc'hel ar renkell a nevez.
<b>An Arnodenn Urzhiataerezh hag Internet (AUI)</b>	Adalek ar 6vet, e vez lakaet ar skolajidi da dapout an AUI. Ar poellad GiBii a vez implijet evit merañ : pa soñj d'ur skolajiad eo barrek d'ober tra-mañ-dra war un urzhiataer, e c'houlenn e vije kadarnaet ar barregezh-se gant ur c'helenn. Ur wech paket a-walc'h a varregezhioù, eo paket an AUI. An AUI a zo ul lodenn ret evit tapout ar breved adalek 2007.	

## Ober eus ar skolaj ul lec'h a geodedouriezh

Ober	Doare	Priziañ
<b>Kuzul Klas</b>	Prientiñ hag ober war dro ar renta-kont trimiziek. <u>Perzhidi</u> : ar rener, kelennerien, kerent, kasourien, skolajidi.	
<b>Kuzul Skolaj</b>	Ober war dro ar vuhez pedagogel ha pemdeziek er skolaj : ar c'houkva, ar predoù, ar beajoù, ... <u>Perzhidi</u> : ar rener, ar penngasour, kerent, kelennerien, skolajidi, tud pedet,	
<b>Kuzul Merañ</b>	Merañ ar skolaj e-keñver ar budjed, ar postadur, an tuta, diorriñ ar skolaj a hir dermen, ... <u>Perzhidi</u> : ar rener, ar gelennerien, kerent, an ti-kêr, an departamant, Diwan Breizh, tud pedet	
<b>An Ode Wenn</b>	Krouet eo bet An Ode Wenn, kevredigezh ar gerent, en distro-skol 2006.  E-giz Skolarn er Releg-Kerhuon, e ra war dro meur a dra : dastum arc'hant evit gwellaat dafar ar skolaj, kempenn salioù, aozañ gouelioù, kemer perzh er preder pedagogel tro-dro d'ar raktres skolaj, ...	
<b>Kelaouiñ ha Bodañ an dud</b>	Ouzhpenn-se e c'hell bezañ savet bodadoù evit ober war dro temoù resis. Ar bodad boued, da skouer, a ra war dro ar predoù, ar c'hantin, ar merenn-vihan, ...	
<b>Kuzul ar skolajidi</b>	2 pe 3 gwech ar bloaz, e vez bodet an holl skolajidi a-benn eskemm war ar vuhez er skolaj ha klask diskoulmoù d'ar c'hudennoù a c'hellfe bezañ.	

<b>Lakaat ar skolajidi da vezañ kirriek</b>	Traoù zo a vez fiziet penn da benn pe evit ul lodenn d'ar skolajidi : aozañ beilhadegoù, ober war dro ar c'hempen er c'hlas, er 'hantin, er c'houskva, ...	
<b>Divizoù</b>	Divizoù a vez aozet diwar benn sujedoù a-vremañ e-pad beilhadegoù pe e-pad kentelioù (deskadurezh keodedel, brezhoneg, ...). Klasket e vo pediñ tud da zont d'ar skolaj a benn pinvidikaat an diviz.	
<b>An endro</b>	Kizidikaet e vez ar skolajidi war ar c'hudennoù stag ouzh an endro : dastum ar paper, espern an energiezh, dibab an dilerc'hioù kantin, ...	
<b>Emzalc'h risklus</b>	Ar skolajidi a vez kizidikaet war ar riskloù a zo stag ouzh produioù pe emzalc'hioù zo : dram, alkohol, butun, darempredoù seksel, internet, ...	

## **5 Ar priziañ**

E fin pep bloavezh skol e vo priziet an disoc'hoù tizhet e-keñver ar palioù a oa bet dibabet. Ar skolajidi, ar gerent hag ar skipailh pedagogel a gemero perzh er brizhiadenn-se.

Rener ar skolaj a savo un teul anvet “renta-kont ar bloavezh”, o renabliñ ar pezh a zo bet lakaet e pleustr hag an doare m'eo bet priziet.

Diwar an disoc'hoù-se e vo termenet palioù ar bloaz da zont gant ar skipailh pedagogel hag ar c'huzul skolaj.

## **6 Stagadennoù**

### **6.1 Karta Diwan**

#### **Mellad 1 :**

Digor eo kevredad Diwan d'an holl familhoù o deus c'hoant da sevel o bugale e brezhoneg, hep lakaat kemm etreze abalamour da abegoù micherel, filosofek pe bolitikel. Digoust ha digor d'an holl eo ar skolioù.

#### **Mellad 2 :**

Bez ez eus Diwan abalamour da ziueroù an Deskadurezh Stad na vez ket roet ganti he flas mat d'ar brezhoneg ; goulenn a ra Diwan e vefe kemeret he skolioù e karg en ur servij publik demokratel ha nevesaet e Breizh, aotreet gantañ implij ar brezhoneg evel yezh vras eus ar skolioù-mamm betek ar skolioù-meur e kement danvez a zo en Deskadurezh.

#### **Mellad 3 :**

Dizalc'h eo Diwan diouzh n'eus forzh peseurt strollad filosofek, relijiel, politikel, micher-emglevadel, h.a. Da heul, e vez goulennet groñs gant stourm Diwan e vefe doujet ouzh kredennoù relijiel, filosofek pe bolitikel hec'h holl izili, petra bennak 'vefe o orin ha keit ha ma ne vint ket a-eneb Diskleriadur Hollvedel Gwirioù Mad-Den. Abalamour d'an doujañs-se, na c'heller ket tremen hepti, e teu Diwan da zifenn ha kas al likelezh war-raok en he doare-kelenn ha da vezañ gwarant frankiz-kredenn pep hini.

#### **Mellad 4 :**

Gant Diwan 'vez krouet un deskadurezh demokratel gant kenlabour tud ar vugale, politikerien ar vro hag ar skolaerien. Goulenn a ra Diwan digant tud ar vugale krouiñ er familhoù un aergelc'h da aesaat implij ar brezhoneg er vuhez bemdez.

#### **Mellad 5 :**

En em ouestlañ a ra Diwan evit kas war-raok implij ar brezhoneg e pep live ar c'hevredad ; ouzhpenn-se, e vez diorroet gant Diwan ur sevenadur e brezhoneg ma vo roet gantañ da bep bugel ar binvioù da c'hoveliañ e zazont e-unan ha ma vo posubl gantañ, evit bugale Vreizh, kemer e karg o endro naturel, sokial hag ekonomikel.

#### **Mellad 6 :**

Sevel ar ra Diwan start a-enep kement unvanadur yezhoniel a zo. Tomm eo ouzh an doareoù sevenadurel liesseurt ma vez o c'henglokaüsted, hervezi, ur vammenn da unaniñ ha kenbinvidikaat. Ar brezhoneg implijet e skolioù-mamm Diwan eo hini ar vro ha tud ar vro.

#### **Mellad 7 :**

Hervez droed didorrus ar pobloù da lâret o soñjoù en o sevenadur, e c'halv Diwan an holl re a blij dezho an demokratelezh, ar strolladoù sevenadurel e Breizh, ar sindikajoù dreist-holl re ar gelennerien, da stourm ganti evit muioc'h a justis hag a-eneb pep aotrouniezh war ar sevenadur.

#### **Mellad 8 :**

Diskleriañ a ra Diwan bezañ gant an holl bobloù a stourm evit o identitelezh sevenadurel, en o zouez an estrañjourien deut da labourat du-mañ rak o liesdoareoù a binvidika danvez mad-den.

## 6.2 Raktres pedagogiezh Eil Derezh Diwan

### DIAZEZ RAKTRES PEDAGOGIEZH EIL DEREZH DIWAN

- Reiñ un deskadurezh e brezhoneg par ha par skiantel ha lennegezh
- Bezañ ul lec'h bevañ, deskiñ, daremprediñ... e brezhoneg
- Kas ar skolajidi war zu an emrenerezh, ar vuhez a-stroll, broudañ o intrudu...
- Digeriñ ar skolajidi war ar bed holl
- Lakaat an holl da dennañ gwellañ gounid eus o barrege-zhioù ha donezonoù hiniennel evito o-unan hag evit mad an holl.

	SKOLAJ/COLLEGE	← DOAREOU/MOYENS → (skouerioù)	LISE/LYCEE
<b>Brezhoneg</b>	- Bezañ gouest d'ober gant ar brezhoneg : da-vevañ e brezhoneg, da grouiñ, dizoleiñ	- Bevañ e brezhoneg - Studiañ e brezhoneg - Ober e brezhoneg - Studiañ e brezhoneg	- Ober gant ar brezhoneg - Dizoleiñ sevenadur Breizh dre ar brezhoneg - Digeriñ war bed brezhonek diwezh an 20e kantved dre ar c'hazetennerzh hag ar c'hleweled - Digeriñ dre ar brezhoneg dorioù ar micherioù
<b>Danvezioù Skiantel</b>	- Kaout gouiziegezh war ar bed skiantel hag an ekologiezh - Kregiñ gant un hentenn skiantel - Kaout ur sell hollek war bed ar skiantoù	- Deskiñ dre ar brezhoneg	- Resisaat an danvez - Implij an hentenn skiantel
<b>Yezhoù Estren</b>	- Deskiñ ar yezh - Dizoleiñ ar vro - Klask soubañ er yezh	- Kentelioù yezh - Eskemmoù lizhiri - Beajoù - radio, télé, tud pedet...	- Bezañ e darempred gant pobloù Europa - Bezañ digor war ar sevenadurioù estren - Bezañ emskiant eus ar yezhoù bihan - Kaout ur preder war ar yezh dre ar yezhadur <b>E saozneg :</b> Kaout ar First Certificate
<b>Doareoù Bezañ</b>	- Mont war-zu an emrenerezh e-keñver buhez a-stroll, labour, soñjoù... - Deskiñ bevañ a-stroll - Doujañ ouzh an endro - Bezañ digor war ar bed holl - Kaout ur spered skipailh ha kenskoazell - Darempredoù gant ar stroll keleñn - Kemer perzh e buhez ar Skolaj e-keñ-ver mont-en-dro boutin, divizoù...	- Kargoù resis - Emvodoù-klas - Kannaded e kuzulioù-klas, kuzulioù-skolaj... <b>Lise :</b> - Kaout 2 gannad e Kendalc'h DIWAN - Gellet bezañ ezel eus kevredigezhioù zo : DAZONT, DIWAN...	- Bezañ emren e-keñver : soñjoù, buhez a-stroll - Kaout intrudu - Bezañ gouest da gas raktresoù da benn - Bevañ a-stroll
<b>Kenluskañ</b>	- Reiñ da bep hini an tuioù, ar binvioù da zont a-benn - Skoazellañ en un doare hollek hag hiniennel	- Kuzulioù-klas - Kenskoazell - Prantadoù hentet-evezhiet - Hentañ - Kentelioù skoazell, lodennoù - Deskiñ-deskiñ	- Kas an holl da live ar vachelouriezh, ar First Certificate
<b>Micherioù</b>	- Dizoleiñ bed ar micherioù	- Prezegenoù, darempredoù... - Staj 3de klas - Prantadoù deskiñ-deskiñ (Skolaj) - Prantadoù hentañ micherel (Lise)	- Anavezout gwelloc'h ar micherioù ha sevel pep a raktres hiniennel - Dizoleiñ danvez micherel dre ar c'hazetennerzh, ar c'hleweled, an treiñ

	SKOLAJ/COLLEGE	← DOAREOU/MOYENS → (skouerioù)	LISE/LYCEE
<b>Sevenadur</b>	- Kaout krog war Sevenadur Breizh, Sevenadur Europa, Sevenadur ar Bed	- Lennegezh c'hallek, vrezhoneg, Breizh - Lennegezh Europa - ... - Raktresoù arzel : c'hoariva, dañsoù, sonerezh, livañ - Istor-Geografiezh Breizh - Istor-Geografiezh Europa - Istor-Geografiezh ar Bed - Kazetennerzh - Kleweled	- Anavezout gwelloc'h sevenadurioù Breizh, Europa hag ar Bed
<b>Sport</b>	- Diorren barregezhioù en un doare hollek (korf ha personelezh) - Degas dre ar skiant-prenet an ampartizoù hag ar gouiziegezhioù a denn d'ar sportoù pe d'an doareoù da zaremprediñ dre ar c'horf - Deskiñ doujañ d'e gorf hag intent outañ ingal	- Dre ar gouren - Sportoù a-bep seurt (aozadur, orin, perzhioù goulennet digant ar c'horf...) - Kompren, doujañ d'ar reolennoù - Dic'hourdañ, diskuizhañ	- Mont pelloc'h gant palioù ar skolaj - Hentañ gwelloc'h labour pe hini : er skipailh, ar gourdoniñ

### 6.3 An AKED

Pal an AKED (Arnodenn Kentañ an Eil Derez) eo reiñ tro d'ar skolajidi da ziskouez o barregezhioù liesseurt e fin ar pevar bloavezh skolaj, dre ar brezhoneg (war bouez ar yezhoù all evel-just) ha reiñ ur plas a-feson d'an ezteurel dre gomz.

Diazezet eo war ar menozioù amañ da heul :

- Kement danvez a vez kelennet, kement tra a vez graet er skolaj a zo talvoudus hag a c'hell, neuze, bezañ priziet e fin ar 4 bloavezh skolaj,
- Leuskel ar skolajidi da zibab danvezioù zo en AKED eo ar gwellañ doare da reiñ un dalvoudegezh d'an arnodenn-mañ (ha, war hir dermen, d'an danvezioù).

Bez' e vo 3 arnodenn dre skrid, tremenet dre ret gant an holl skolajidi.

- Brezhoneg
- Matematik
- Istor ha Geografiezh

Pep skolajiad a ranko ivez tremen 3 arnodenn dre gomz (da zibab etre ar 4 rummad amañ dindan). D'ar muiañ e c'heller dibab un danvez dre rummad.

Danvezioù Skiantel ha Teknikel	Danvezioù Yezhel ha Lennegezh	Danvezioù Sevenadurel	Danvezioù Pleustrek
Matematik	Brezhoneg	Istor	Sonerezh
Skiantoù Fizikel	Saozneg	Geografiezh	Arzoù kaer
SVD	Galleg	Deskadurezh Keodedel	C'hoariva

Urzhiaataerezh	Alamaneg		Sport
Teknologiezh	Kastilhaneg		
	Latin		

Ret eo tapout ar geidenn hollek (75 poent diwar 150) evit tapout an AKED.

N'eus ket a notenn skarz.

## 6.4 Ar beajou

Dre ar beajou e vez tizhet palioù ar skolaj : bevañ asamblez e brezhoneg, dizoloñ sevenadurioù, implijout ar yezhoù studiet er skolaj, ...

Diouzh ment ar skolaj eo bet aozet ar beajou e mod-se :

- E 6vet                      Ur veaj 3 devezh gant ar pal anavezout gwelloc'h Breizh hag e sevenadur. Klasket e vez kejañ gant brezhonegerien e-pad ar veaj.
- E 5vet/4<sup>e</sup> (bep 2      Ur veaj en ur vro saozneger (Kernev Veur, Kembre, ...) e-pad ur vloaz)                      sizunvezh. Implij ar saozneg eo ar pal kentañ.
- E 3<sup>e</sup>/4<sup>e</sup> (bep 2      Ur veaj en ur vro kastilhaneger (Euskadi, ...) e-pad ur vloaz)                      sizunvezh. Implij ar c'hastilhaneg eo ar pal kentañ.
- E 3<sup>e</sup>/4<sup>e</sup> (bep 2      A bep eil e vez degemeret Sorabiz pe aozet ur veaj da Vro Sorab. vloaz)                      Implij an alamaneg eo ar pal kentañ.
- E 5vet pe e 3<sup>e</sup> (a      Ur raktres da vezañ kaset da benn er skolaj war un tem bennak (Arzoù, bej eil)                      Sport, Skiantoù, ...). Pedet e vo arbennigourien eus war un danvez bennak da gas ur raktres da benn e-pad 3, 4 pe 5 devezh.

## 6.5 Istor ar Skolaj

- 1977** : Kentañ klas mamm DIWAN
- 1980** : Kentañ klas kentañ derez
- 1988** : Kentañ skolaj DIWAN : ur c'hlasad 6vet
- 1991** : Kentañ skolajidi o tremen ar breved : 100% degemeret
- 1994** : Kentañ klas eilvet : 18 skolajiad  
141 skolajiad eus ar 6vet d'an 3e (6 klas)  
An holl glasoù skolaj a zo kemeret e karg gant ur c'hevrad stad.
- 1995** : Ur skolaj nevez e Plijidi (22)
- 1997** : Kentañ liseidi o tremen ar bac : 100% degemeret
- 1997** : Digorodigezh ad-skolaj Kemper
- 1999** : Ur skolaj nevez e Gwened  
Staliet eo da vat al lise e Karaez
- 2003** : Digorodigezh ad-skolaj Treglonou (6vet ha 5vet staliete ti An Oaled)
- 2006** : ad-skolaj Treglonou a za da Gwiseni (5 klas eus ar 6vet d'an 3<sup>e</sup>)

Setu amañ dindan an niver a skolajidi a c'hortozer e Gwiseni er bloavezhioù da zont.

	6vet	5vet	4e	3e	Hollad	Klasoù
Bloavezh 2006	<b>26</b>	<b>30</b>	<b>19</b>	<b>24</b>	<b>99</b>	<b>5</b>
Bloavezh 2007	17	<b>26</b>	<b>30</b>	<b>19</b>	92	4
Bloavezh 2008	35	17	<b>26</b>	<b>30</b>	108	5
Bloavezh 2009	20	35	17	<b>26</b>	98	5
Bloavezh 2010	30	20	35	17	102	6
Bloavezh 2011	37	30	20	35	122	7

An niveroù-se a zo savet diwar an niver a vugale e skolioù Diwan Lesneven, Gwitalmeze ha Plabenneg. Kontet e vez ivez 10 % a vugale o tont eus skolioù divyezhek publik pe prevez.

## **6.6 Sevel ul lec'h skoliata ha bevañ klok**

Abae an distro-skol 2003, e Treglonou, emaomp o klask klokaat an ti-skol. Keit na vo ket klok al lec'h a zegemer ar skolaj, ne vo ket posubl da ziorriñ an holl raktresoù na da dizhout an holl balioù.

Staliañ ul lec'h gouest da zegemer an holl skolajidi hag an holl raktresoù eo ivez ar gwellañ doare da brientiñ dazont ar skolaj.

Raktres Diwan en eil derez a zo diazezet war ar soubidigezh e brezhoneg, kenkoulz war an deiz ha goude ar c'hentelioù betek an noz. A bouez bras eo, neuze, kaout ul lec'h da zegemer an holl skolajidi e giz diabarzhiad. Evit bezañ oberiant, e rank ar c'houkva bezañ bras a-walc'h da heuliañ kresk ar skolaj, bezañ staliet mat, bezañ buhezet gant ur skipailh kasourien o kinnig oberiantizoù talvoudus.

Evit gallet kinnig kentelioù talvoudus en holl zanvezioù, en holl dachennoù, e rank bezañ er skolaj salioù ispisializet staliet ha pourvezet mat : sal ar skiantoù, sal teknologiezh, sal ha tachenn sport, sal video, sal arzoù kaer, un oaled, sal c'hoariva, ....